

CLEMMOU ANN ANAON.

1. En han' Doue, tud vad, chilaouit ar goel-
van, Eus ann Anaon kæs, var ho guele a
dân. *Discan.* Criste-nien, hor breudeur, ho
pet truez ouzomp!... Eur beden e-vidomp!...

2. Envor tud ann douar, a harp e tâl ar bez ;
Kerent ha mignonet, d'ar maro hoc'h ancouez !...
3. Eveuz al loenet-mut, pa vent e creiz ar boan,
Ann dud ho deus truez : ouzomp-ni na reont van !...
4. Ni a zo gouscoude, ho preudeur, ho kerent ;
Pa oamp c'hoaz 'barz er bed, en em garemp kement !...
5. Bez' ez omp oll memprou euz Jezuz, hor Zalver !...
Bezit trugarezuz pelloc'h en hor c'henver !...
6. Mar 'z euz c'hoas var ar bed eur galon druezuz,
Ra bedo evidomp : hor poaniou 'zo spountuz !...
7. Oll boaniou ann douar ne dint nemet moget
E kichen hor poaniou ; 'n em zicour n'hellomp ket.
8. Tàn a zo dindannomp : tân zo var hor gorre,
Tân zo a bep tu deomp ; leski reomp nos ha de.
9. Leski a reomp en tân heb paouez nos ha de ;
En eun tân bet c'houezet gant Justis eun Doue !...
10. 'Tre poaniou ann Ifern ha re ar Purgator,
Ne 'z euz ken kemm, nemet n'eo ket alc'houeet ann or !
11. Kerent ha mignonet, en han 'Doue pedet,
Pedet 'vit ann Anaon, heb truez dilezet !...
12. 'Vit hon tenna er meaz euz hor prizon scrijuz,
C'hui a hell, Cristenien, meur a dra talvouduz !...

13. Pedet a greis-calon hor mamm-sacr ar Verc'hez,
Da scuilla yarnomp oll eul lommig euz he lez!...
14. Pedet a greis-calon oll zent ar Baradoz,
Pedet dreist-oll Jezuz da roi deomp he vennoz!...
15. Iunit, grit aluzen, piniennou calet,
Oberou-mad eleiz!... En Env viot paët!...
16. Gounezit evidomp ann Induljansou bras
A heller da c'hounit 'n eur ober hent ar Groaz!...
17. N'euz ket da c'hoad Jezuz 'vit hon tenna a boan
Rag hen hebken a hell mouga rag eün ann tân!...
18. Grit eta lavaret 'vidomp offerennou;
Sacramantit ive, gouneet induljansou!...
19. Oh! sec'het bras hon deuz, 'n han' Doue, breudeur kez,
Hastit prim, roit deomp euz ann dour a vuez!...
20. Ho pet truez ouzomp, c'hui diana mignonet,
Scouet omp gant dorn Doue, re hon deus ho caret!
21. O va mab! o va merc'h! o va breur! o va c'hoar!
Truez ouzomp pelloc'h, grit ma zaimp prest d'ar gloar!
22. E Baradoz Doue, pa vimp digoueet, tud vad,
Ni hor bezo 'vidoc'h diganthan peb miennad!
23. Neuze ni c'houlenno sicour evidoc'h oll
Da viret ne iafe hini ebet da goll!...

PEDEN.

24. Digorrit ho paloes, o Jezuz, hon Autrou,
D'ann oll eneou fidel, dalc'het 'barz er flammou,
Ebarz ho Paradoz, ra vezint eüruz,
D'euz ho meuli Jezuz!

(Ar vers man a zo great evit beza canet en Ilizou hag en nos-veillou.)

Imprimatur

Quimper, le 29 octobre 1878.

Du MARHALLAC'H. V. G.

(Propriété réservée.)